

# Gwerz savet en memor

## d'an dud beuzet war al lestr SANT-PHILIBERT

### d'ar 14<sup>ved</sup> a viz Even 1931

Ton : KER-IS.

## I

Kenvroiz eus a Vreiz-Izel,  
Dont 'ran adarre d'ho kervel  
Evit silaou eur ganaouen  
'Meus rimet gant kals a anken.

## II

Alies 'meus grêt tro ar vro,  
Dreist-holl eun nebeut amzer 'zo,  
A dost hag a beil diouz ar gêr  
'Meus kanet dre bep sort amzer.

## III

Goude distruj dour ar c'hreiste  
Ilis Plougonven warlene,  
Ha maleuriou bras Konkarno  
E meus baleet meur a vro.

## IV

Met breman, gant kalz a c'hlac'har,  
Pa neus ken war hon taol douar,  
E teuan da c'houlenn skoazel  
Digant holl zent koz Breiz-Izel.

## V

Da zont da harpa va fluen,  
Ma kavin ar wir sklerijen,  
Da ziskleriea d'ar Vretoned  
Ar c'holl braz zo bet en Naoned.

## VI

D'ar zul, parzeg a viz even  
Aet d'ober eur bourmenaden  
War lestr anvet Sant-Philiber,  
A grenn-dost da gêr Sant-Nazer.

## VII

War bemp-kant e oant partiet  
Mintin mat a gêr an Naoned,  
Vit tremenn ar bras eus an de  
Barz en enezen Noarmoutier.

## VIII

Da vont, ar veach 'oa bet brao,  
Met, siouaz ! ar mor en em zao,  
Kement ne oa ken a voyen,  
Kaer a oa esaat dere'hel penn.

## IX

O tistrei, etal Sant-Gildas  
Al lestr, barz e fons ar mor bras,  
A zo bet aet en berr-amzer ;  
Pebez glac'har d'o zud er gêr.

## X

Pa glevchont ar c'helou spontus,  
O oaint rentet ken malevrus,  
Chommet o zud e kreiz an dour  
Heb n'helle den d'o zikour.

## XI

Kriz a oa klevet o c'hlemmou,  
Bugaligou, tadou, mammou,  
Priejou nevez dimezet,  
Holl nemet eiz int bet beuzet.

## XII

Gwelit 'ta 'l lestr Sant-Philiber,  
'Neus gret, siouaz, kalz a vizer,  
'Lezel en fons ar mor distur  
Tud en o brasa plijadur.

## XIII

Pevar-c'hant-hanter, pe war-dro,  
'Lerer, deus kavet o maro  
Hep konta ar vugaligou  
'Oa c'hoaz war barlen o mammou.

## XIV

D'ar re a zo bet soveteet,  
Souetomp ar gwella yec'hed,  
Mar teufont d'en em gonsoli  
Demeus ar sort merzerenti.

## XV

Ma teuy ar gonsolasion  
Da ezelaat pront o c'halon  
Ha da chom gren 'pad pell-amzer  
Goude kement-all a vizer.

## XVI

Hogen gwelit, va c'henvroiz,  
'Zo kalz a dud en eur stad trist,  
Kemeromp peurz en o foaniou,  
O sikouromp 'n o ezommou.

## XVII

Rak ar blaneden 'zo kalet,  
Siouaz, en bro ar Vretoned,  
Ar mor, gant e fallagriez  
A ra maleuriou aliez.

## XVIII

Nag a bet gwech 'teu ar sord fall  
D'ober glac'har da gement all,  
Rak 'nomp ket c'hoaz evit miret,  
Deus dour, na kurun, na luc'hed.

## XIX

Dreist-holl, Breiziz, tud an Arvor  
Kouls er mene evel er mor,  
'Tud ar c'heriou ha war ar mêz,  
Truez demeus an dudou kez,

## XX

A zo hirio oc'h hirvoudi  
Gant dienez braz en o zi,  
Poaniet barz en pep sort feson  
Gant trubuilhou ha ran-galon.

## XXI

Silaouomp eta o c'hlemmou,  
Greomp d'ezo aluzennou  
Breudeur omp holl war an douar,  
Kouls er joa evel er glac'har.

## XXII

Hervez hon galloud hag hon stad,  
Mez, deuomp holl a galon vad,  
Karomp, greomp vad d'hon nesa  
Tre ma vefomp war ar bed-man.

## XXIII

Rak hini 'hanomp ne oar lenn,  
'Pez a verk deomp ar blaneden,  
Met dre ma tremenn an deyou,  
Ar miziou hag ar blaveziou.

## XXIV

A pa deufer en toull ho tor  
Deuit gant eur galon digor  
Da zigemer gant karante,  
Sikouromp an eil egile.

## XXV

Ha neuze, holl e vemp laouen,  
Hag ar vuez, berr da dremenn,  
Rak hon poaniou a zo dister  
Kichen tud kez Sant-Philiber.

## XXVI

Diskit ar werz man, penn-da-benn  
Sentit demeus skrid va fluen,  
Ha sur 'oun, ar wir Vretoned  
Deuio muioc'h d'en em garet.

## XXVII

En hon pedennou, barz er gêr  
Pedomp Aotrou Sant-Philiber  
Ma vezo ar gwir avokad  
Vit an dud beuzet en e vag.

## XXVIII

Goulomp, en amzer da zoned  
Ar peoc'h etre ar Vretoned,  
War vor, kouls vel war an douar,  
Demeus hon traonien a c'hlac'har.

## XXIX

Rak ar vuhez, meurbet 'zo berr,  
Buan e tremenn an amzer,  
A greiz-holla 'vez diskaret  
Ar c'hrenva a zo war ar bed.

## XXX

Goulenomp en eur finissa,  
Ar Baradoz 'vit an dud-man ;  
D'an eiz 'zo chommet en buhe :  
Ar yec'hed ha prosperite.

Emil GALLIC, kaner brezonek, PLOUGONVEN.